

**Helies Guillaume (Lomig)** (Bodiliz 1861 – Lezneven 1941). Beleg.

**Heritourien Biel**, bet embannet e 1900. Modernnaet eo bet an doare-skriva.

**Personajou**

**Biel al liardou**, oajet dija.

**Jermen**, mevel yaouank gand Biel.

**Meris**, amezeg ha kamarad Biel.

**Valentin**, barner, oajet ivez dija.

**Julian**, 30 vloaz.

**Anton**, 28 vloaz.

**Olier**, 25 bloaz.

**Bielig**, 5 bloaz, mab Julian.

**Manuel**, klasker bara,50 vloaz.

**Daou dest.**

# Arvest kenta

*War leurenn an teatr, eun daol, diou gador, eur houir.*

## Kenta diviz

### Biel

*(Goude eva ar rest euz e volennad chistr en eur azeza).*

Gwelom buan petra 'zo nevez hirio gand va hazetenn. Eun dra ral eo kaoud enni keleier da ober pljadur, rag en amzer-vremañ eo diêz kompren penaoz ema an dud an eil e-keñver egile.

Sell, petra 'welan amañ ?... *(En eur lenn)*. Afer heritourien ar miliner ruz. Dilun kenta, da unneg eur euz ar mintin, an herirurien a zo galvt dirag al lezvarn diwar-benn an tamm levez chomet war-lerh maro ar miliner euz a Jarivari... Ar yaouanka euz ar vugale, droug-kontant euz an doare m'oa greet al lodennou gand an egspert, a houlenn ma vo asrannet al leve dre zaouarn tud all... *(En eur deuler e gazetenn)*. N'am-boia ket hen lavaret Sakondien<sup>1</sup>, nag a draou poaniuz ! Ne glever mui nemed ar memez kanaouenn ; sikan ahalen, sikan a-halehont, diwar-benn leveou. A-veh ma vez diskennet bremañ korv unan bennag er vered, e weler an heritourien oh en em zastum en-dro d'e dammig peadra, prest avad d'en em zrailla vl bleizi, pa gav dezo e vez roet eur spillenn muioh d'an eil eged d'egile.... Daoust hag en em gavet e ve an amzer a gomze anezañ va zad, Doue her pardono ! « Eur poent a deuio, emezañ, ar vugale n'o-devezo karantez nemed en arhant, mall ganto da weled o zud o sevel evid sailla ar al leve... O ! mil sakondien, pebez tra euzuz ! Ra blijo gand Doue na hoarvezo ket kemend-all en ti-mañ goude va maro ! *(Sevel a ra en e zav)*.

---

<sup>1</sup> Sakondien : ?

## **Eil diviz**

**Jermen**

... Mestr, setu amañ ho tabatierenn, leun a vutun fresk-beo ! Er memez amzer e tegasan deoh eur helou. N'ho-peus ket klevet ar freuz a zo gand heritourien ar miliner ruz ?

**Biel**

Diwar-benn al leve 'zo chomet, neketa ?

**Jermen**

Just avad !

**Biel**

Sakoudien, emañ o paouez lenn an afer em hazetenn... Eur vez eo emichañs ! eun dismegañs ! Gweled eun hevelep trabas e-touez breudeur, ha diwar betra c'hoaz !... Me en em houlen e gwirionez e peleh emañ ar garantez ?

**Jermen**

Mad ! va lezit d'hen lavared : petra bennag n'on ket euz ar finna, emedoh, eur glaoustre a rafen gand n'eus forz piou e c'hoarvezo amañ eun dra bennag evel-se goude ho maro.

**Biel**

A zoñj dit ? Bez dizourisi war ar poent-se : em zi-me ar c'hoari a vezo didrouz kaer, rag me am-eus greet va zestamant hag a oar dre daouarn piou e kouezo va liardigou.

**Jermen**

Etre daouarn Olier hag Anton, na petra 'ta ! Da biou e vent ken ?

**Biel**

Hein ! ! Piou 'zo bet o fourra ar zoñj-ze en da spered !

**Jermen**

Den ebed. Anad a-walh eo emichañs ho-peus lakaet hoh oll fiziañs en daou niz-se, e-leh an niz all, Julian...

**Biel**

Ro peoh din gand Julian. Henez n'en-deus biskoaz va haret e gwirionez, evel m'o-deus greet an daou all, ha koulskoude Doue a oar pegen mad on bet en e geñver, beteg derhel war ar mên-font e vab kosa Bielig.

**Jermen**

A ! Mestr ! c'hwi ho-pezo eun dromplezenn, ma ro Doue amzer a-walh evid anaoud ar wirionez 'hed an neudenn... An niz na hellit ket gouzañv dirazoh, henez eo ho kar euz goueled e galon, e-leh an daou all, va hredit pe n'her grit ket, ne garont nemed ho liardou.

**Biel**

Ta, ta, war ar poent-se, ne fell ket din da gredi, tamm ebed, nann, ne fell ket din.

### **Jermen**

Va hredi a hellit. Anton hag Olier,ken aliez gwech ma teuont d'ho kweled, ne reont nemed ho rouza, ha kercent ma vez o zreid er-mêz, e tirollont da hoarzin goap... Sur on, ar re-ze o-desu mall e veh maro, abalamour da helloud krabanata ho peadra.

### **Biel**

O ! ma ve gwir kement-se ! Sakondien, ma ve gwir !

### **Jermen**

Re wir, siwaz ! Daoust ha n'am-eus ket o hleved gand o haketerez : « Tonton Biel, emezo, ne zaleo ket da doullreda... Nag a liardou a chomo ganeom da ziloueda... Peseurt tortad a raim en e enor deiz e varo... »

### **Biel**

Hein ! Evel-se o-deus lavaret ?...Toullreda, liardou da ziloueda... eun tortad en va enor ?...

### **Jermen**

Ya, Mestr, ha kalz traou all euzusoh, dirag kanfarted heñvel outo, hag a hellfen da heñvel deoh.

### **Biel**

En an'Doue, n'her gra ket ; n'am-euz ezomm ebed d'o anaoud. ... (*en eur azeza*)... Sakondien. Pebez rangalon ma ve gwir ! Jermen, kerz da ober da labour ha me 'jomo amañ, evid ober gwelloh va zoñj...

## Trede diviz

**Biel**

*(e-unan)*

Anton... Olier... Poan am-eus o kredi kemend-all euz o ferz....Koulskoude, ma ve ar wirionez e tu Jerman e-leh beza em hini-me, ha perag ne ve ket ? Santimantchou an dud a zo ken diêz da anaoud en on amzer ! Da heul ar homzou flour a zered diwar o muzellou, e kredefh moarvad n'ho-peus ket kaerroh mignoned war an douar, ha ma ve dizoloet goueled o halon, petra 've kavet ?

O ! ma ve gwir lavar Jerman ! Mez penaoz en em gavoud gand ar wirionez ? Eno ema an dalh.

## Pevare diviz

**Moris**

Ahanta, amezeg penaoz ez a ar bed ganez, abaoe an taol domino on-eus greet disul tremenet.

**Biel**

Ne da ket re fall en oll, a drugarez Doue... Moris ... Kemer ar gador a zo aze ha tosta amañ da ober eur frapad marvaillad ; n'az-peus ket a bres-labour, a gredan.

**Moris**

*(en eur azeza)*

Takebie<sup>2</sup>, me 'gav teñval da benn, mantruz, Biel paour ; n'em gavez ket war da du pe betra ?

**Biel**

Evid klañv, n'on ket, a drugarez Doue, ha zoken, hen lavared a ran dit, biskoaz n'am-eus kavet c'hwekoh va zammig boued eged bremañ ; mez setu amañ petra 'zo : eun dra a zo deuet da zikompeza va spered hag ez an d'her honta dit gand ma taoli evez d'hen rikla da zen ebed.

**Moris**

Bez dineh en eur gonta din da enkrez ; beteg hirio, hen gouzoud a rez, n'on ket bet lakaet e-mesk ar ridellou toull.

**Biel**

War dri niz am-eus, hag a anavezez mad, ez eus daou, Anton hag Olier, hag a garen dreist o breur kosa, dre ma kave din o-devoa evidon eur garantez leal ; setu perag ez eus bremañ tri bloaz am-eus greet eun testamant evid lezel ganto va oll liardou, goude ar fin ahanon... An testamant 'zo bet lakaet etre daouarn ar barner Valentin... Na lavar grig da zen ebed war kement-mañ, neketa, Moris ?

**Moris**

Bez dizoursi eur wech c'hoaz, takebie, ne vezi ket gwerzet.

**Biel**

'Vid doare, an daou niz-se (an ano a ganfarted a dlefen rei dezo) ne reont an neuz d'am hared nemed abalamour d'am liardou, o-deus mall da fourra en o godellou.

**Moris**

N'eo ket euz o ferz, nann.

**Biel**

Egile, er hontrol, hervez ma lavarere, am har meurbed, ha n'ema ket e zaoulagad o vervi war va feadra.

Setu perag on lakaet nehet a-walh.

**Moris**

---

<sup>2</sup> Takebie : ?

Nehet, Biel ? Hag abalamour da betra, kleo ?

**Biel**

Sakondien, defaot gouzoud sklêr e pe du ema ar wirionez, evid ma hellin en em gemered en eun doare all gand va zestamant. Va entent a rez ?

**Moris**

Bremañ eh entantan... Mad, selaou ar pezh am-eus da lavared dit :Ha ma rafes evel Laou an Trutal, a oa ken nehet ha te, defaot gouzoud ivez gand pehini euz e nizien 'oa karet e gwirionez ?

**Biel**

Petra 'reas hennez 'ta ?

**Moris**

Eun dra farsuz, mintoue ! A ! A ! A !... Evid anaoud santimantchou e nizien en e geñver e soñjas ober ar maro bihan, ha, ha, ha...

**Biel**

Sakondien, biken n'am-bije divinet eun heveleb finesa !

**Moris**

Mad, takebie ! Kred ahanon, deut 'oa braoig a-benn euz e daol, rag, d'ar mare ma teredas e nizien en aviz teuler dour benniget war ar varvskaoñ, Laou a jome kuzet a-dreñv eun armel, hag ahano e welas doare pep hini anezo.

**Biel**

Ha peseurt doare a gavas dezo, Moris ?

**Moris**

Lod anezo a ziskoueze kaoud glahar, mez beza ez oa daou hag a ziskoueze nebeutoh a geuz d'o eontr eged a vall da gleved pegement a leve a jome da zastum war e lerh ; setu perag, pa zispakas Laou euz e doull-kuz, meudig an daou-ze a gouezas brao en o dorn, a hellez kredi.

**Biel**

Mad a reas Laou en em gemered en doare-ze ganto. (*Sevel a ra en e zav da vale*). Sakondien, nag a dud faoz 'zo war an douar.

**Moris**

Da beleh ez ez 'ta evel-se ?

**Biel**

(*ennañ e-unan hag en eur vale*)

Ne ven ket pell, nann, 'vid ober an dro... Teodou an dud a yelo marteze war a-raog... Goude toud, petra 'ra ze din-me ar pezh 'vo lavaret... (*da Voris*). Ya, Moris, setu greet ganen va zoñj : eun taol heñvel euz hennez a fell din da ober, sakondien, hag ar henta eo ar gwella... (*Gweled a ra Jerman*) : Jerman ! Jerman !

## Pemped diviz

**Jermen**

Petra 'zo, mestr ? (*en eur weled Moris*). Boñjour, Moris.

**Moris**

Boñjour, va faotr-me.

**Biel**

Selaou, Jermen... kerz en eur redadeg beteg ti an aotrou barner, ha lavar dezañ dond amañ raktal.

**Jermen**

Mez n'ouzon ket piou hennez...

**Biel**

N'hen anavezet ket. An Aotrou Valentin, pe mar deo gwelloh ganez, an aotrou 'zo lesanvet gand an dud an *Aotrou Nonde vingt-deux* ?...

**Jermen**

Petra ? Hennez eo an aotrou barner ? Hen anaoud a ran neuze... Ne gav ket din e ven pell evid her haoud, rag bremaig edo e-tal dor e di. (*Mond a ra kuit*).



## C'hwehved diviz

**Moris**

Abalamour da betra e rez 'ta degas Valentin amañ ?

**Biel**

Abalamour da betra ? Evid lakaad ar ziell war va hrouf a zo ennañ va liardigou, rag, her gouzoud a rez koulz ha me, ar hiz 'zo da ziella traou eun den maro, ken na ven en em zastumet an oll heritourien.

**Moris**

Takebien, gwir a-walh e lavarez, A ! A ! A ! Ankounac'haet am-boa dija, 'vid doare, edos o vond d'en em lakaad e renk ar re varo... evid eur pennadig.

**Biel**

*(goude azeza ouz taol)*

Da hortoz Valentin eo red mad din farda eun testamant nevez. Selaou ar pezh ez an da skriva : « Me... Biel... Penn-dañvad, a fell din... e ve... roet... va danvez... d'an niz en-devezo... diskouezet... kaoud... ar muia... keuz... din... goude va maro. »

**Moris**

Pe tiaoul a skrivez ?

**Biel**

Lez ahanon 'ta da achui... : » Va mevel... a vezo... karget da rei da anaoud d'an aotrou Valentin... barner... ano an niz... karantezusa...

**Moris**

Biskoaz n'am-beus gwelet, mintoue, eun hevelep testamant.

**Biel**

*(oh ober van ebed)*

« An testamant-mañ... a freuz... kement hini all... am-befe greet... diagent. Greet... d'ar henta... a viz Ebrel... mil nao-hant eiz... Eun tamm skrabadenn evid sinatur ha mad pell zo... (*Da Voris*). Hein ! Moris, petra az-peus-te da lavared bremañ ? N'eo ket c'hoari fin an draze ?

**Moris**

Ne ouien ket, nann, 'oas ken louarn ha ma 'peus an êr da veza... Deut eo ganez avad, hag amañ ivez eur poent bennag, biz meud meur a hini a hellfe koueza en o dorn, Biel.

**Biel**

Ha goude m'her grafe, ne ven ket souezet tamm ebed goude ar pezh am-eus klevet, mar deo gwir da vihanna... Da hortoz, na lavar grig ebed war gement-mañ, neketa, Moris.

**Moris**

Bez dizoursi : n'eus ket a risk e ves gwerzet gand da gamarad koz... Mez, evid cheñch kaoz, e peleh e chom 'ta an aotrou Valentin ? Daoust ha Jermen en-defe greet tro houllou ?

**Biel**

Kleo ! Setu eñ arru., a zoñj din. Pa vez komzet euz ar bleiz, te 'oar...

**Moris**

E vez gwelet e ziou skouarn.

**Biel**

Pe ar penn all... n'eus forz...Alo, mar kerez e savim en or zav da rei degemer dezañ...  
(*Sevel a reont*).

## Seizved diviz

**Valentin**

*(en eur zeha e hwezenn)*

Boñjour : petra 'zo nevez 'ta dre amañ, *non de vingt-deux*, pa'z eur deut d'am hlask gand kemend a bres ?

**Moris**

Va hamarad Biel en-deus eun tamm afer da ober ganeoh hag a houlen ma ve dibunet ar henta posubl.

**Valentin**

Eun afer, Biel ? ha diwar-benn petra ?

**Biel**

Her gouzoud a rez, Valentin ; bremañ ez eus war-dro tri bloaz am-boea greet eun testamant, hag hen lakaet am-boea etre da zaouarn.

**Valentin**

Ahanata nonde vingt-deux, N'ema ket etre daouarn mad ?

**Biel**

N'eo ket an dra-ze a fell din da lavared, pell ahano.... Selaou, ahanon eur pennadig... Lakaet on nehet gand ar pezh am-eus klevet diwar-benn va nizien, hag am-eus soñjet ober eun eil testamant. Setu hen amañ war an daol... Kemer anezañ, mar plij, ha pa'z-pezo hen lennet e roi din da aviz.

**Valentin**

*(goude lenn an testamant)*

Meur a destamant a zo tremenet dija dirag va daoulagad, mez farsusoh eged hemañ n'am-eus biskoaz gwelet avad !

**Moris**

Evelato e hell paseal evel-se, emichañs ?

**Valentin**

Ya, paseal a hell, dre ma n'eus netra a-eneb al lezenn. – Ha neuze, Biel, petra az-peus c'hoant e ve greet anezañ ?

**Biel**

C'hoant am-eus da genta d'her huzad aze e diabarz va hrouf, ha goude-ze, e rafes eur vad evidon ma karfes siella ar hrouf.

**Valentin**

Siella ! Nonde vingt-deux, perag komz a gement-se ? N'ema ket c'hoaz ar hiz da lakaad ar siell war danvez eun den enorabl evel d'out, a-raog ma vez maro.

**Moris**

Gwir a-walh ar pezh a leverit, aotrou, mez Biel en-deus fourret en e benn ar mao bihan.

**Valentin**

Hein, ar maro bihan ! Hag en aviz petra ?

**Moris**

Evid anaoud surroh santimantchou e dri niz en e geñver : rag, evel ma ouezoh hoh-unan, goude maro eun den eo eh anavezer ar gwella toud ar pez a vez soñjet diwar e benn.

**Valentin**

A ! nonde vingt-deux, bremañ avad eh ententan ! (*Da Viel*). Peur eta e fell dit e ve lakaet ar ziell ? Ma ne zîêz ket kement-se ahanout, ez an d'hen ober raktal... Lavar da zantimant.

**Biel**

Ne houlenan ket gweloh, Valentin. Ar buanna greet eo ar surra.

**Valentin**

Mad ! kemer da destamant ha fourr anezañ en eur horn pe gorn euz da grouf.... Goude-ze e klaskot din, ho-taou, ar pez a zo red evid siella, eun tamm koar, hag eur houlaouenn. (*Biel a zegas koar, Moris a alum eur houlaouenn*). .. (*Valentin, en eur zispaka e ostill da ziella*). – Moris, dalh ar houlaouenn tost din, ha te, Biel, stign an tamm ruban-lien-mañ war pren ar hroufr... Evel-se... Divenn 'zo bremañ da freuza ar ziell, pe d'hen sevel, heb na ven war al leh... Al lezenn her goulenn !

**Moris**

(*Da Viel*)

Me 'gave din az-poa eur servij all da houlen.

**Biel**

Mad a rez hen degas din da zoñj ! Edon o vond d'hen ankounac'haad... ! (*Da Valentin*). A-raog mond kuit, ne hellfes ket ober eur vad all c'hoaz evidon, Valentin ?

**Valentin**

Gwelom da genta petra eo.

**Biel**

N'ema ket c'hoaz ar hiz d'ar re a zo maro skriva liziri d'ar re veo.

**Valentin**

Ne zoñj ket din, tra.

**Biel**

Rag-se, e pedan ahanout da skriva em leh, ar henta ma helli, evid kemenn d'am nizien e vin sammet gand eur hleñved speguz bennag, gand ar vosenn, hag oa ranket va anterri raktal, heb rei amzer d'ar gerent da zond d'am anterramant... Ar vad-ze a rafes evidon, Valentin ?).

**Valentin**

Entetet eo, ha konta a hellez warnon, nonde vingt-deux). Kenta tra a rin oh en em gaoud er gêr a vo skriva al lizer-ze... ha sur on, da nizien ne vezint ket diwevad evid en em gaoud amañ warhoaz vintin... Alo, kenavo, Moris, ha chañs vad d'an hini 'zo o vond da vervel. (*Mond a ra kuit*).

**Biel**

Bennoz Doue dit, alato, Valentin.

**Moris**

Din-me eo poent ivez tostaad euz ar gêr. (*N'eus ket tu da lenn war al leor orin*). Ar chatal a zo da voueta, ha va hini goz a dle beza nehet dija ganen... Mez warhoaz vintin, me 'vo amañ kerkent ha da nizien, mar gellan, evid gweled penaoz e tremeno an traou... Da hortoz e ve mad dit kentelia Jerman war ar pezh en-devezo da ober.

**Biel**

Bez dizoursi, soñj am-eus d'hen ober.

**Moris**

Kenavo warhoaz, Biel ; n'eo ket inoui a ran ganez.

**Biel**

Na me kennebeud ganez-te :kenavo, Moris.

## Eizved diviz

**Biel**

Dre aze emhout, Jerman ?

**Jermen**

*(o tereded)*

Ya, mestr, petra 'zo 'ta ? *(En eur weled ar ziell)*. Ar ziell 'zo lakaet amañ ? O ! mestr ?  
petra ?

**Biel**

Na da ket da ober bremañ da ziod : digor frank da ziouskouarn : warhoaz vintin va nizien  
en em gavo amañ sur a-walh...

**Jermen**

Ho nizien ? Adarre ?

**Biel**

Ya ! Skrivet e vo dezo bremaig evid lavared e vin maro, hag anterret raktal goude va maro,  
abalamour da eur hleñved speguz.

**Jermen**

O ! evelato ! mestr.

**Biel**

Kredabl, an tri niz-se ne vankint ket da rei da anaoud ar santimantchou a vagont em  
heñver, hag o veza ma chomin kuzet dre aze, e hellin dond a-benn da lenn beteg goueled o  
halon.

**Jermen**

Bremañ avad hoh ententan... Gweled a reot, mestr, edo ar wirionez ganen pa lavaren 'oah  
karet muihoh gand Julian eged gand an daou all.

**Biel**

Lez da hlabous !... – Dre ma teuint beteg va zi, gra an azen ganto, ha diwall ma ven  
gwerzet ganez...

**Jermen**

Bezit dineh ar gement-se, me 'oar an doare da veza finnoh eged n'am-eus an êr da veza...  
O ! lezit anezo etre va daouarn.

**Biel**

Konta a ran warnout... Beteg vremañ out bet eur servijer leal... eur paotr sentuz... eun den  
yaouank fur... mad da renta servij...

**Jermen**

Ha goude, mestr ?

**Biel**

Netra, kaketer ma'z out... *(En eur vond kuit)*. Ha dreist-oll, gra azen ganto ; ma tennez mad  
da daol, me da baeo.

### **Jermen**

Paea diohtu a hellit neuze, rag evel pa vije tennet eo dija.

### **Biel**

Gwelet e vo ! gwelet e vo ! Gortozom an devez warhoaz. (*Mond a ra kuit*).

## **Naved diviz**

### **Jermen**

Mad, pa 'ma an traou o vond da dremen evel-se, eo red din mond d'en em wiska e kaoñ, ha kemered eur penn-ognon evid lakaad tres an daelou war va daoulagad...O ! na me am-eus mall da weled warhoaz o tond : pebez abadenn a dremeno en ti-mañ ! Gand ma teuio da vihanna va lavar da veza gwir ! Ne houlennan gwelloh, rag neuze va mestr n'en-devezo muioh a fiziañs en e Jermenig e kement afer all a hellfe c'hoarvezoud da houde !



## **Eil arvest**

*(War an teatr : ar hrouf siellet... a-zioh daou dok a-zistribill ha poltred Biel... E-kichenn ar hrouf eur bouteier... En eur horn :eur paravel hanter zigor).*

## **Kenta diviz**

### **Jermen**

*(Harpet ouz ar hrouf, pe azezet warnañ).*

... Julian, ar hosa euz nizien va mestr, a zo bet gwelet o tiskenn dre an hent don, gand e vab Bielig krog en e zorn. Ne zaleo ket d'en em gaoud amañ, a zoñj din, ha marteze e zaou vreur, Anton hag Olier ne vint ket pell war e lerh.... *(O sevel en e zav)*. O ! na me am-eus mall e ve sklêrijennet va mestr war santimantchou pep hini euz e nizien en e geñver ! Hen lavared a ran, hag hen toui a rafen, ar gounid diweza a jomo e tu Julian,, evitañ da veza istimet ken nebeud a dra beteg vremañ... Setu unan bennag o tostaad... Kemerom buan or mouchouer, rag heb hemañ, hervez ma leverer, n'ez eus na kaoñ na glahar gwirion ebed... *(Ober a ra an neuz da zeha daelou pa deu Julian)*.

## Eil diviz

**Julian**

*(krog e dorn Bielig)*

Boñjour dit, Jermenig paour ! *(Biel a vez gwelet o tond da zelaou a-dreñv ar paravel).*

**Jermen**

Boñjour deoh ivez, Julian. Setu-c'hwi en em gavet a-barz ar fin.

**Julian**

N'oa ket posubl din en em gaoud a-raog an eur-mañ, rag ar helou poaniuz n'eo bet anavezet ganeom nemed deh goude or hoan... Paour-kêz tonton Biel ! Eur maro trumm en-deus bet, war ar gont-se ?

**Jermen**

Eur maro trumm, ya, hen lavared a hellit ! Biskoaz n'am-eus gwelet den ebed o vond buannah... Euz ar mintin 'oa ken seder ha n'eus forz piou, ha deuz ar pardaez 'oa skubet... Sellit, pa deu ar zoñj-ze em spered, e tered eur hwezenn yen euz va bizaj !... Iskuzit ahanon, ma rankan skuilla daelou dirazoh...

**Julian**

Kemer kouraj atao, Jermen. An hini a oa war eun dro da vestr ha va zonton, n'eo ket manket degemer mad er bed all, rag e zakramantchou diweza...

**Jermen**

Siwaz ! Petra livirit aze ?

**Julian**

Da entent a ran : ar pezh a fell dit da lavared eo n'en-devezo ket bet a amzer a-walh... N'eus forz ! Eur hristen aketuz d'e oll zeveuriou, evel ma'z eo bet eñ, ne hell ket beza surprenet en eur stad fall gand falh ar maro... Soñj aliez e kement-se, Jermenig, hag az-pezo nerz da zougenn ar groaz 'zo lakaet da goueza war da ziouskoaz koulz ha war va re-me !

Pounner eo e gwirionez !!...

**Jermen**

C'hwi, 'vid doare, Julian, a gare meurbed ho tonton.

**Julian**

Feiz ! dinatur a-walh e vijen, ma n'am-bije ket her haret, goude an oll vad greet gantañ en or heñver, pa edom c'hoaz o sevel, va breudeur ha me. On tad, ouspenn ma n'oa ket pinvidig, a jomas pell amzer war e wele, hag or mamm, red dezi soursial dioutañ, n'oa ket gouest gand he gwella bolontez da hounid bara deom. Mez va zonton, dre vadelez evidom, a zegasas d'on ti peadra da zebri ha dillad da wiska, ken na oam en oad da labourad on-unan.- Goude kement-se, n'eo ket just, a gav dit, em-bije karantez evitañ ? *(Biel a zeh e zaelou).*

**Jermen**

Mad, hen lavared a hellan deoh, ho Tonton ivez ho kare, muioh eged na ziskoueze, ha ne ven ket souezet, goude m'en-defe lezet ganeoh eul lodenn greñv euz e zanvez.

**Julian**

Perag komz a draou evel-se ? Selaou : Jerman : n'eo ket en aviz kleved pegement a beadra a jom war-lerh va zonton ez on deredet amañ : n'hen garfen ket nebeutoh, ha goude m'en-dije implijet e oll leve, pe en oberou mad, pe evid lakaad pedi Doue evitañ... – Goude toud, e zanvez a oa dezañ, dre ma'z oa bet gounezet en onestiz.

### **Jermen**

Koulskoude, Julian, eun tammig heritaj ne ra ket a zroug da gaoud, pa heller her dastum dihlanbouz<sup>3</sup>...

### **Julian**

Ne lavaran ket ar hontrol ; mez eur wech c'hoaz, mar don deredet beteg amañ, eo evid kleved ganez peseurt maro en-deus bet va zonton, a-barz mond d'ar vered, hag evid kontanti er memez amzer va mab Bielig, na roe peoh ebed din defaot beza degaset ti e Bareon... Ar paour-kêz bihan ! ped gwech n'am-eus-me ket her hlevet er goañv tremenet ? « Tata, emezañ, pa deuo an hañv, e rankim mond beteg ti Parrain, hg e welo pegen brao e skrivan bremañ, abaoe m'on eet d'ar skol gand ar Frered. » Siwaz ! setu kollet evitañ ar blijadur-ze ! Da vihanna, Jerman, gra deom on-daou eur blijadur all.

### **Jermen**

Pehini, Julian ?

### **Julian**

Degas deom poltred va zonton a welan aze stag ouz ar vogger, ma ne ziêz ket ahanout ?

### **Jermen**

Diêz ebed, Julian, diêz ebed : mond a ran d'hen dispega diouz ar vogger.

### **Julian**

*(Da Vielig)*

Bremaig e weli poltred da baeron, va faotr-me !

### **Jermen**

*( o kinnig ar poltred)*

Eun tammig eo mogedet, mez n'eus forz, êz a-walh eo c'hoaz da anaoud.

### **Julian**

O ya 'ta !... Paour-kêz tonton Biel *(en eur bokad d'ar poltred)*.

Degemerit an testeni-mañ euz va harantez hag euz va anaoudegez vad... *(En eur lakaad ar poltred dirag Bielig)*. Ne welez ket aze, Bielig, poltred da Bareon ?... Heñvel-beo, sell, atao gand ar memez daoulagad seder a ree pa en em gaves gantañ... Ro eur pokig brao dezañ... Bremañ, Jerman, e hellez hen hemeret evid hen lakaad en e blas,, ha Bennoz Doue dit.

### **Jermen**

*(o kemered ar poltred hag en eur e gas d'e blas).*

Evid netra, Julian, evid netra.

### **Julian**

---

<sup>3</sup> dihlanbouz : bous : ?

Kenavo a lavaran dit, a-raog mond da lavared eun *De profundis* d'ar vered... (*En eur bellaad*). N'ouzon ket avad ha me a zistroio dre amañ, rag meur a afer am-eus da ober gand va amezeien goz.

## Trede diviz

**Biel**

*(o tond a-lamm).*

Julian !... Bielig !...

**Jermen**

*(strafuillet)*

O ! mestr ! Petra 'rit 'ta ?

**Julian**

Va Doue ! Va Doue, petra 'welan-me ? C'hwi eo, va zonton ?

**Biel**

Ya, me va-unan ; korv hag ene... O ! va lezit da bokad deoh ho-taou... va halon a zo barr a levenez.

**Julian**

Livirit din buan perag oh en em glevet gand Jermen, evid rei deom eur seurt spontadenn, en eur zegas beteg ennom ar helou euz ho maro, ha c'hwi leun a vuhez, a drugarez Doue.

**Biel**

E daou her hepken hen livirin dit, va niz : c'hoant am-boa da anaoud peseurt santimantchou az-poa em heñver.

**Julian**

Mar deo posubl evelato c'hoari eun dro evel-se !

**Biel**

Ha mall braz eo ganen ivez gweled ha da vreudeur o-deus eur galon ken karantezuz ha da hini... Kredi a ran ne zaleint ket d'en em gaoud amañ.

**Jermen**

War gement-se e hellit beza heb douetañs ebed ; dond a raint ivez en aviz pedi, mez n'eo ket d'ar vered avad ez aint, mestr !

**Biel**

Glabouser, da beleh 'ta neuze ez aint, e soñj dit ?

**Jermen**

Amañ, sellit, e-barz ho krouf, evel an Hebreed gwechall e-barz al leue aour.

**Biel**

Sakondien, ma ve gwir ! Goude tost, gwelet e vo. *(Da Julian)*. Da hortoz e ve mad dit kas da vab da di an amezeg tosta, rag amañ, te 'oar, e hell tremen meur a dra gouest da drubuilla ar hêz bihan !

**Julian**

Ar pezh 'zo sur, eno e vo kalz ebatoh e zoare eged e-touez an emgros<sup>4</sup>. Mond a ran d'her has.

### **Biel**

Ya, hag hast buan ober da dro, abalamour dit da veza dre amañ adarre kerkent ha da vreudeur, mar gellez : mez dalh kloz da henou avad ar ar pezh a dle tremen.

### **Jermen**

Entetet eo, va zonton : kontit warnon ha kenavo ar henta. (*Mond a ra kuit gand Bielig*).

---

<sup>4</sup> emgros :?

## **Pevare diviz**

### **Jermen**

Ahanta, mestr, n'edo ket ar wirionez ganen 'ta, pa lavaren deoh 'oah muioh karet gand Julian eged gand an daou niz all ?

### **Biel**

Gortozom ken a vo achu an abadenn a-raog barn an nesa. Julian am har evid gwir, ne hellan mui hen nah abaoe ar pezh am-eus gwelet ha klevet. Mez piou 'oar ? Marteze an daou all a ziskouezo kaoud muioh a garantez c'hoaz eged hemañ.

### **Jermen**

Ta, ta, ta, na dit ket da fourra traou evel-se en ho penn... Ho Jermenig n'eo ket euz ar re finna, posubl eo ; louarn a-walh eo koulskoude pa vez meneg da zivinoud petra eo an dud !

### **Biel**

Alo, sah moked !...bombañser fall : setu te adarre o vralla da gloh heb ezomm... Pebez tech divalo az-peus aze ! sakondien.

### **Jermen**

Ne gavan ket e ve hennez eur perzh fall ! Emichañs eo mad din bralla va hloh pa ne fell da zen all ebed kaoud ar vadelez d'hen ober em leh.

### **Biel**

Selaou ahanon, Jermen... N'eo ket deread e teufes evel-se da ober da veuleudi. Lez ar soursi-ze gand unan all bennag, pe ganen-me, hag e vezi estimet gand an oll kant gwech just muioh eged bremañ.

### **Jermen**

Neuze ne dalv ket mui ar boan din lavared netra ?

### **Biel**

Nann, da vihan war an afer a dle tremen amañ, me hen divenn ouzit, rag n'hen ananvezez gwelloc'h ebeg n'her gran va-unan.

## **Pemped diviz**

**Moris**

Takebie, Biel, kaoud a ra din eo poent dit en em zacha ahalese... Anton hag Olier a zo arru du-ze er hroaz-hent, mez n'o-deus ket an êr da zond da eun enterramnt.

**Biel**

Hein ! Petra 'lavarez ?

**Moris**

Nann, n'o-deus ket an êr da veza gwall hlaharet. Setu ar pezh a fell din lavared... Gwir eo, n'am-eus o gwelet nemed a-bell hepken ; koulskoude avad ar jolori 'zo ganto, o haketerez hag o gwiskamant, a verk daou zen diskramailh.

**Jermen**

Ahanta ! Mestr !

**Biel**

Te 'zo eun torr-penn, sakoudien : dalh da deod en da henou ken na vo goulennet da aviz diganez. (*Da Voris*). Mad, Moris, n'eo ket evid ober eur rebech dit eo ; mez da gomzou a dreuz va halon e-giz eur gontell.

**Moris**

Na da ket da gemered enkrez re abred, Biel paour : marteze an daou niz-se, en em gavet amañ, a gemero eur stuz deread hag a lezo da bara santimantchou kaerra a guzont e goueled o halon.

**Biel**

Ne houlenan ket gwell eged gweled da gomz o tond da wir, mez ne jom ket ganen kalz a esperañs mui.

**Moris**

Takebie, kemer kouraj atao... ha kerz da guzad, rag eur spont am-eus a vez paket dre amañ... Kerz, a lavaran dit.

**Biel**

*(En eur bellaad)*

C'hwi ho-taou a jomo aze, neketa ? Taolit evez avad d'am gwerza.

**Moris**

Bez dizoursi : ne vezi ket gwerzet ganeom.



## C'hwehved diviz

### Jermen

Ne ouezoh ket, Moris !... Eun nebeud a-raog ma'z oh en em gavet, an niz kosa Julian a oa o paouez mond ahann.

### Moris

N'eo ket posubl ?! Koulskoude, kaer am-boa beza war evez, n'on ket en em gavet da deuler va daoulagad warnañ.

He neuze, penaoz eo bet tremenet an traou ?

### Jermen

Evid ar gwella, Moris ; e-giz m'am-boa divinet... Va mestr ne hello mui nah eo karet gand Julian, rag ken tenneraet eo bet e galon en eur gleved e niz, ma'z eo deut a-lamm da bokad dezañ a-dro-vriad ha d'e vab Bielig a oa ivez gantañ.

### Moris

Hein ! gweled a rafez, Jermen ! – Ha da beleh eo eet Julian bremañ, pa n'her gwelan ket dre amañ.

### Jermen

Da gas e vab beteg ti on amezeg tosta ; ne zoñj ket din e ve pell oh ober e dro... Selaouit : setu-eñ o tostaad, kredabl a-walh.

### Moris

O ! nann, n'eo ket eñ eo... Kredi a rafen kentoh e ve an daou all... (*o selaou*) o ! ya ! Anton hag Olier int : euz o mouez o anavezan bremañ... Chom sioul...

## Seizved diviz

*(Olier hanter-vezo, hag Anton diabaf o tond en eur gana) :*

Mil bennoz d'an ankou  
A ro deom kalz madou :  
On Tonton 'zo maro  
En e leh ni 'vevo. *(bis)*

*(Biel a deu adarre a-dreñv ar paravel da zelaou).*

### Moris

*(da Jerman)*

Takebie, Jerman, setu en em gavet daou lustrugenn ha n'o-deus ket an êr da gaoud nemeur a boan spered.

### Olier

Poan spered ! doubl barrikenn, n'ouzon ket eo an dra-ze.

### Moris

Mardouen, da vreur ne zeblant ket hen anaoud kennebeud, hervez an doare anezañ ?

### Anton

Nann, a dra zur, a drugarez Doue !

### Moris

Gwell a ze deoh, neuze, va zud vad, ha salo na rafeh morse anaoudegez ganti, mez taolit evez na ve tostoh deoh eged na zoñjit.

### Anton

Er hontrol, pelloh ema eged biskoaz, abalamour d'an heritaj braz on-devezo da zastum amañ. Nag a beziou aour a dle chom war-lerh on Tonton.

### Olier

Pebez tortad a raim, hein, breur ?

### Jermen

Mar deo posubl komz en eun doare ken mezuz !

### Anton

Te, Jerman, 'zo pedet da gloza da vuzellou, neketa ; pell amzer a-walh az-peus greet da vestr en ti-mañ, war digarez m'edos e servij eun imobil koz ; cheñch baz d'an tambourin a zo poent bremañ, paotr !

### Moris

Evidon-me, a-zao gand Jerman. Ne gavan ket deread euz ho perz e teufeh da gomz euz ho Tonton, en doare ma rit, goude ma'z eo bet ken mad evidoh.

### Anton

Ken mad ! petra 'livirit euz an hinkin koz-se ? Ya, ken mad, m'en-dije faoutet eur pez a wenneg e pevar evid rei deom eun draig bennag d'or halanna.

Sur on, ne grede ket debri leiz e gov, abalamour d'e avaristed.

**Olier**

Ni a zebro en e leh, hein, breur ?  
(*Biel a ziskouez e gounnar*).

**Anton**

M'en-deus greet eur vad bennag, eo lavared kenavo d'ar bed-mañ.

**Olier**

Requiescat in pace. Amen.

**Anton**

Ha c'hoaz, ma vez red displega an traou evel m'emaint, e lavarfen n'eo ket eñ e-unan eo en-deus greet ar vad-se, mez ar vosenn venniget a zo deut d'hen samma, evid lezel ar re all da ober gwelloc'h implij euz e liardou.

**Moris**

Eur vez eo komz en doare-ze !

**Olier**

A ! pebez tortad a raim (*da Voris*) ha n'eo ket en da enor-te eo avad, amprevan koz !

**Moris**

Me 'ra forz, a gav dit, en enor da biou e ri da dortad ? Lezel da storlok 'zo gwelloc'h dit, miltakedien, ha taol evez na hellfes ket peurober kement tra 'zo en da zoñj... An ali-mañ n'eo ket eun immobil eo hen ro dit...

**Anton**

Evidom-ni, Olier ha me, n'eus ket a leh da gaoud nehamant, rag kement liard 'zo en ti-mañ a zo da ranna etrezom...

**Olier**

(*o komañs kana*)

Mil bennoz d'an ankou...

**Anton**

Chom sioul, Olier, ma tisplegin sklêr an traou d'ar re-mañ. (*Da Voris ha da Jermen*). Bremañ ez eus war-dro tri bloaz, on Tonton en-deus greet eun testamant, ha dre an testamant-se en-deus gouezet da biou rei e liardou.

**Moris**

Da biou 'ta, mar plij ?

**Anton**

Da biou en-defe o roet ken da Olier ha din-me ?

**Moris**

Mar dout ken sur ha ma lavarez, n'am-eus nemed rei peoh.

**Anton**

Ya, sur on ; ken sur ha ma'z eus pemp tri biz war va dorn. Daoust ha n'am-eus ket gwelet an testamant ? Hag hen lennet am-eus ivez penn-da-benn, da geñver eun devez m'en-doa on Tonton ankouanc'haet pernna e armel.

*(Biel a weler o tehad kuit,, leun a gounnar).*

O ! gortozom ; bremaig pa vo ar paper-ze etre on daouarn, meur a hini a gavo gras stanka e henou.

## **Eizved diviz**

**Olier**

*(O tiskouez Julian a zo oh antreal).*

Sell, breur, setu aze eun tarzeller all, evel pa ne vefe ket a-walh dija.

**Anton**

Julian a gav dezañ moarvad n'en-deus nemed en em ziskouez en ti-mañ evid gweled liardou aour tonton Biel o koueza evel glao war bal e zorn.

**Moris**

Takebie, c'hwi 'zo divergont, evelato : Julian a zo breur deoh, ha beteg gweled, en-deus gwir d'en em zerhel e diabarz an ti-mañ, da nebeuta kement ha n'eus forz pehini ahanoh hotaou.

**Julian**

Moris, na rit ket a van evid o hleved... Ma ne deuont amañ nemed en aviz krabanata peadra on Tonton, ar buanna ma hellint, n'o-deus ket a leh d'en em fougeal, rag an oll a gavo divalo an doare-ze da ziskouez doujañs ha karantez d'an hini en-deus or haret kement, p'edom o sevel.

**Olier**

Double barrikenn, pebez prezeger a ra hemañ !

**Anton**

Re ziwezad, Julian, e teuez gand da brezegennou... Ma karjes, e vijes bet heritour war ar memez renk evidom-ni, mez lavar da *vea culpa*, rag morse n'az-peus klasket an tu da rouza Tonton Biel, ha da fourra kaol dezañ a-dreuz e henou, evel ma ranker ober e-keñver an dud imobil.

**Julian**

Hag e soñj deoh ho-pezo brasoh chañs vad goude ar goaperez-se ? Evidom-ne n'her hredan ket.

**Anton**

Gra kaerroh... Kerz d'or flatra d'an Tonton, du-ze d'ar vered ; gweled a ri ha selaouet e vezi gantañ.

Etre daou, ar pezh 'zo greet a jomo greet, ha kaer az-pefe gina pe en em glemm ouz an dud, al leve a zo deom-ni on-daou, Olier ha me.

**Olier**

A ! pebez tortad a raim, hein, breur !

**Julian**

Me am-befe mez o tigeri va genou da lavared traou evel-se, amañ.

**Moris**

Takebie, Julian : me 'zo koz dija, emichañs, hag hen toui a hellan, morse n'am-eus klevet komzou ken divergont : eur vez eo ! eru vez eo !

**Anton**

N'eo ket a-walh kleved radoterez... A-raog pep tra, eo red en em gaoud gand an testamant...

Jermen, daoust ha na ve ket lakaet ze e diabarz ar hrouf ? Koulz eo deom komañs der aze !

**Jermen**

*(en eur ober eul lamm evid divenn ar hrouf).*

Na dit ket pelloh, mar plij... Den ebed ne hell touch ouz ar hrouf-mañ, rag siellet eo, evel m'her gwelit hoh-unan, ha me a zo karget d'hen diwall nemed ar barner a ve war al leh.

**Olier**

Pebez ger dicheg a-berz ar marmouz-se !

**Anton**

Mar deo red kaoud ar barner, n'on-devezo ket kalz a zale evid mond d'her hlask... Dond a rez, Olier ?

**Olier**

Taolom evez, breur ! Ha ma ve dibradet eun dra bennag ahann, e-pad ma vezim oh ober on tro ?

**Anton**

Bez dineh war ar poent-se ; a-bell 'zo dija eh anavezom kement tra a zo war-dro an ti-mañ, ha ma vanke an disterra spillenn, ni a ouezfe war biou lakaad ar beh da goueza.

**Julian**

Mad, gand aon da veza tamallet gand nikun ahanoh, me a zo o vond er-mêz en ho raog. Didrabasoh e vo evidon.

**Moris**

Me am-eus c'hoant da ober evel d'out, Takebien... Ya, kerzom ahalenn, evid muioh a frankiz d'an daou-mañ... Ne ve ket brao beza fourret en afer ganto...  
*(Mond a reont kuit).*

**Anton**

Evel ma kavot ar gwella, aotrouien ; an nor a zo digor dirazoh... *(da Jermen)*. Te, Jermen, a hell da vihanna chom aze da ziwall an ti... Onest out, a gredan, ha ma rez da zever evel e-giz ma'z eo dleet, ni ne vankim ket da rei dit eun dra bennag evid da boan, goude m'on-devezo rannet al leve.

**Jermen**

N'am-eus ezomm a netra ! Bennoz Doue deoh... Ouspenn-ze, c'hwi ne gavoh ket ho-pezo re evidoh hoh-unan.

**Anton**

Ne hellez ket va respont en eun doare dereatoh ? E peleh out-te bet o teski an dereadurez da vihanna ? *(da Olier)*. Deus ahaleze, Olier, beteg ti ar barner, kentoh aze e vezim distro.

**Olier**

*(en eur vond kuit)*

Pebez tortad a raim, hein, breur ?

## **Naved diviz**

**Jermen**

*(e-unan)*

Ya, kerzit beteg ti an aotrou Valentin, daou zen divergont ma'z oh ; ha distroit gantañ en aviz lipa kement tra 'zo amañ. Gwelet e vo neuze piou en-devezo tro da hoarzin. – Bremañ ez an da gaoud va mestr, evid her helenn war ar pezh a zo tremenet, gand aon n'en-defe ket gellet heulia an abadenn penn-da-benn. Petra 'zoñjo ? Petra 'lavaro ? O ! ya, ya, mall am-eus d'her gouzoud !

*(Ar ridoj a gouez d'an douar).*

## Trede arvest

*(An teatr a zo evel an eil arvest)*

### Kenta diviz

**Anton**

*(a-raog antreal)*

Antreit 'ta, mar plij, aotrou barner !

**Valentin**

Petra bennag ma n'ema ket va hêr amañ, e sentan ouzit. Mond a ran eta da genta en ti...  
*(Valentin, gand Anton, hag Olier war e lerh a weler o tond war an teatr).*

**Anton**

Asuri a rit eta deom, aotrou Valentin, ez eus eun Testamant greet gand on Tonton, hag a lez al leve da ranna etre va breur Olier ha me.

**Valentin**

Ya, hen asuri a ran ; netra n'eo surroh ; mez gand aon na chomfe eun tammig douetañs war ho spered, ez an da lenn dirazoh an Testamant-se, rag ganen ema em godell... *(Goude hen dispaka)*. Selaouit mad evid gelloud tañva gwelloc'h ar pezh 'zo skrivet gand ho Tonton. Doue her pardono : « Me, Biel Penndañvad, a fell din rei va oll danvez, goude va maro, d'am daou niz Anton hag Olier, en distro euz ar garantez birvidig o-deus bet evidon... Greet d'ar henta a viz Ebrel mil nao-hant pemp... Sinet : Pendavad ». *(En eur ginnig an Testamant)*. Ma ra plijadur dit kaoud an Testamant, n'az-peus nemed her hemered.

**Anton**

*(laouen en eur fourra an Testamant en e hodell)*

Bennoz Doue deoh... pa'z eo gwir 'oah eur hamarad d'on Tonton, c'hwi a lavarfe deom marteze pegement a leve a jom war e lerh ? N'ho-poa ket klevet gantañ ?

**Valentin**

Eo, klevet a reen gantañ kement tra a zelle ouz e aferou. Ho Tonton, abalamour d'e urz vad, en-deus gellet lakaad ugent mil lur war interest.

**Anton**

Ugent mil lur ! Ha pegement dre gant e roe dezañ ar zomm arhant-se ?

**Valentin**

Eur skoed dre gant, ar pezh a ra c'hweh-kant lur ar bloaz a leve, mar gouezout konta.

**Anton**

*(da Olier)*

Ni o lakaio da rei c'hwezeg real dre gant, eiz-kant lur leve etrezom on-daou.

**Olier**

Ma ne ve nemed an dra-ze ne ve ket druz !

**Anton**

Hag an ti, aotrou barner, pegement e kav deoh e ve gellet tenna dioutañ ?



**Valentin**

An ti,... gand ar porz-kloz,... gand e dammig liorz ?...War-dro tri-hant lur ar bloaz da nebeuta...

**Anton**

Goulennom neuze pevar-hant lur : unan bennag a vo kavet atao d'her hemered evid ar priz-se.

**Olier**

Ha goude, netra mui da gaoud ?

**Anton**

Ne welan ket, da vihana.

**Olier**

Mad, kompren a hellez, breur, ne daim ket a-bell gand ar c'hweh-kant lur leve lezet da bep hini ahanom gand an hinkin koz.

**Anton**

Evid gwir, ne vo ket braz ar yalhad.

**Valentin**

Petra 'livirit, nonde vingt-deux ? Me ho kwav gwall direzon er gement-mañ : petra !! Nag a dud war an douar n'o-deus ket ar bederved a gement-se, ha ne zoñjont ket en em glemm... Eüruz e tlefeh beza, emichañs, mar gellit dond a-benn da zastum heritaj ho Tonton.

**Olier**

Mar gellit ? Mar gellom ?

**Anton**

Sklêr a-walh eo avad, a drugarez Doue, ar pez 'zo merket war ar paper.

**Valentin**

Ya, war ar paper a zo ganez en da hodell, mez ho Tonton a hell beza greet eur paper all, piou 'oar ? Abalamour da ze, a-raog ho lezel da gemered netra, e rankan furchal mad e peb leh, ha dreist-oll er hrouf a welan aze siellet.

**Anton**

Ober ar pez a livirit aze, aotrou barner, a ve eur holl-amzer, a zoñj din.

**Olier**

Evel p'on-dije amzer da goll, hein, breur.

**Anton**

Evel-se ne dalv ket ar boan.

**Valentin**

Nonde vingt-deux, gouzoud a ran petra 'lavarán ; ha va dever da genta... Mond a ran da glask daou dest evid sevel dirazo ar ziell... Chom a hellit aze ;me ne vin ket pell. (*Mond a ra kuit*).

## Eil diviz

**Olier**

Te a gred ar pezh a gont ar radoter koz-se, e hell beza eun eil testamant evid freuza al labour vad a zo greet gand ar henta ?

**Anton**

Lezom hennez gand e randonerez, ha greom evel pa vem ar vistri. Daoust ha tonton Biel en-dije soñjet ober eun dra evel-se, pa ne oa ket gouest da zivinoud e reem goap anezañ ? Biken n'her hredin...

Sell, breur, aamñ e welan daou dok kazi nevez-flamm, hag a zeblant goulenn beb a bennda holei... Evidon me a zo o vond da êsa unan ; gra eveldon, mar kerez !(*Kemered a ra unan euz an tokou*).

**Olier**

*(en eur dostaad da gemer egile).*

Ar pezh 'zo sur, gwelloc'h êr on-devezo gand peb a dok eged gand or hoz bonedou krazet.

**Anton**

*(goude êsa e hini)*

Dichañs war an taol kenta ! hemañ a zo re laosk din-me ; hag an hini az-peus-te kemeret, Olier ?

**Olier**

Double barrikenn, a zo re stard : kement ha lavared ! Ha ma rafem eun trok ? Marteze en em gavint euz on doare !

**Anton**

Akord rakatal... (*Goude an trok*). Aha ! An tok-mañ a zo evel greet evidon ! Pegen êz !!... Pegen skañv !...

**Olier**

Ar memez tra a hellfen lavared dit euz hemañ !...Pegen brao e tle diskenn war va zal !...

**Anton**

Ne vo ket fall, emichañs, d'an aotrouien vraz, beza saludet ganeom... Evel-henn, sell...(*en eur saludi Olier*) : Boñjour, Aotrou Olier, A ! A ! A !

**Olier**

*(o saludi ivez)*

Boñjour, Aotrou Anton, A ! A ! A !

**Anton**

Dalhom mad d'ar re-mañ, Olier ! Kement-se tapet eo atao diwar leve on Tonton benniget.

**Olier**

Mez, da hortoz gwelloc'h, hein, breur.

**Anton**

O ! Kredi a hellez n baseim gand an nebeud-mañ... A-forz da dañva, e teu an naon. (*Kleved a reer Manuel o lavared e Bater e-tal an nor*).

## Trede diviz

**Olier**

Kleo !... daoust ha piou a ve aze o vourouellad e toull an alhwez ?

**Anton**

Eul laskar bennag, kazi sur, o klask beva diwar-goust e nesa.

**Olier**

Mond a ran da weled. (*D'ar paour*). Tosta amañ, ha lavar dioustu petra out deut da ober ; rag n'on-deus ket amzer da goll.

(*Biel a vez gwelet o tond a-dreñv ar paravel evid eur pennadig hepken*).

**Manuel**

Eur gwennegig d'ar paour, mar deo ho madelez !

**Anton**

Koulz 'oa goulenn deg gwenneg war eun dro ! Ken buan greet e oa ! – Te a zoñj dit moarvad e valeom amañ war an aour !

**Manuel**

Ho Tonton ne vanke morse da rei aluzenn.

**Olier**

Du-ze er vered her havi ; gra dezañ or gourhemennou.

**Anton**

Eur wech all on-devezo muioh a êz da rei dit eun draig bennag.

**Manuel**

Me am-eus naon, koulskoude.

**Olier**

Double barrikenn, me am-eus sehed ivez, heb gelloud banne abaoe div eur, ha n'eus ket kement-se a storlok ganen.

**Manuel**

(*en eur vond kuit*)

N'ho-pezo ket muioh a chañs vad goude ober goap euz ar paour. Kenavo.

**Anton**

Ya, kenavo, ha salo ma ve morse gwelet da dreid war-dro an ti-mañ.

**Manuel**

(*war treujou an nor*)

N'ho-pezo ket a chañs vad.

**Olier**

Kerz ahaleze, a lavarer dit, labous-noz ma'z out !

**Anton**

Setu aze eul laskar hag a zo deut d'on direnka diwar on labour... Olier, petra 'zoñjez ? Ha ma kemerfem ivez beb a re voutou, e-mesk ar bouteier a zo aze en daou du d'ar hrouf ?

**Olier**

N'eo ket eun dra fall kennebeud... Gwelom neuze ha ni a vo ken chañsuz hag an tokou.

**Anton**

*(o tribrada eur re voutou)*

O ! tonner<sup>5</sup> ! Ar re-mañ a zo eur beh anezo, ha n'ouzon ket penaoz e helle an imobil koz bale ganto.

**Olier**

Diskouez 'ra, Anton. *(goude oztibrada hag o zeuler d'an douar a-frap)*.... N'eo ket me a garfe ober eul leo gand eur seurt bagou... Mad da werza d'ar pillaouer pa dremeno dre aze.

---

<sup>5</sup> tonner : galleg.

## **Pevare diviz**

**Jermen**

*(o klevet trouz ar boutou, a zired).*

Piou a zo aze ? Piou a zo aze ?

**Anton**

*(En eur zaludi)*

Boñjour, aotrou Jermen.

**Olier**

Boñjour, aotrou Jermen.

**Jermen**

Iskuzit, me a gave din divroidi.

**Anton**

Ni, divroidi ? Pebez fron ! Evid piou az-peus-te c'hoant d'or hemered ?

**Olier**

Mar deus eun divroad amañ, eo te, ha ne vem ket pell evid hen diskouez dit... Mez a-raog pep tra all, lavar deom : daoust ha n'az-peus ket laeret netra diwar diwar or houst e-pad m'edos dre amañ da-unan ?

**Jermen**

Me, laerez eun dra bennag ? Evelato ne garfeh ket e ven lakaet e-mesk al laeron... Furchit ahanon !

**Anton**

N'az-peus ket ezomm ebed da grial evel ma rez : da gredi a reom, va Doue benniget... Alo, kerz da beurechui da labour... *(pa 'z eo eet Jermen dija pell)*. Ma kendalhez da veza fur, ni roio dit marteze poltred on Tonton Biel, a zo amañ a-zistribill.

**Olier**

Poltred eur marmouz kaer, hein, breur ?

## Pemped diviz

**Valentin**

*(en eur antreal gand daou dest).*

Petra 'welan, nonde vint-deux ?

Tokou Biel dija war ho penn ? N'emaoh ket diwezad o kregi...

**Anton**

Bremañ pe diwezatoh, an dra-ze 'zo kevatal, aotrou barner.

**Valentin**

A gav dit ? mez n'eo ket va zantimant din-me, da vihanna beteg-henn : Bremañ e vo greet ar sklêrijenn... Mond a ran da zevel ar ziell dirag an daou zen a volontez vad o-deus asantet servijoud da destou, evid gweled ha n'eus ket eun Testamant all e diabarz ar hrouf.. *(En eur freuza ar ziell)*. Ma n'eus hini ebed amañ, ne gav ket din e ve kennebeud e leh all ebed... Sellom piz e pep korn, heb direnka re ar pez a vo dastumet ennañ !...

**Olier**

*(da Anton)*

Gand ma raio tro houlo, da vihanna !

**Anton**

Aze n'eus ket muioh a destamant eged n'ez eus peziou aour war bal va dorn.

**Valentin**

*(O tifoucha eur paper)*

Ahanta, petra 'lavaren-me ?

**Olier**

Petra 'zo, 'ta ?

**Valentin**

Skrivet eo war ar paper-mañ : eil Testamant Biel Pendavad.

**Anton**

Siwaz !

**Olier**

Piou en-dije kredet ?

**Valentin**

... Gwelom ar pez 'zo diabarz : « Me, Biel Pendavad, a houlen ma vo roet va danvez d'an niz en-devezo diskouezet kaoud ar muia keuz din goude va maro. Va mevel Jerman a vezo karget da rei da anaoud d'an Aotrou Valentin, barner, ano va niz karantezusa... An testamant-mañ a freuz kement hini all am-befe greet diagent... Greet d'ar henta a viz Ebrel mil nao-hant eiz. »

**Olier**

M'on-dije gouezet 'oa red diskouez keuz !!



### **Valentin**

Hen gweled a rit, bremañ, koulz ha me ; an testamant-mañ a hell cheñch doare an traou...  
Da biou e vo al leve ? Den n'her goar, goude vingt-deux, nemed diviner e ve...

Beteg gouzoud pehini euz an tri niz a vo kavet mad da herita, an testamant-mañ a jomo etre  
va daouarn, hag ar hrouf a rank beza kaset raktal beteg an ti-kêr. (*An daou dest a gemer ar  
hrouf evid mond kuit, gand Valentin war o lerh : hemañ a-raog pellaad*) : Alo ! Kenavo, va  
zud vad, hag en eur reketi kement a chañs vad d'an eil ha d'egile ahanoh.

## **C'hwehved diviz**

**Anton**

Klevet aa-peus-te biskoaz ano a gemend-all ? Rei al leve d'an niz a dlee diskouez ar muia glahar ?... Teir gwech imobil a ranke beza on Tonton a dra zur, pa ree eur seurt paper.

**Olier**

N'eo ket chom da vantri eo bremañ : poent eo labourad, breur paour, mar fell deom kaoud an heritaj on-devoa kement a ezomm anezañ evid gelloud en emzisleha !

**Anton**

Gwir eo, ni on-daou en em glevo atao, n'eus forz pehini ahanom a vo dibabet evel heritour : mez penaoz mired ouz Julian da veza choazet en on raog ? Eno ema an dakh.

**Olier**

Deom da gaoud or breur : marteze, gand or homzou flour hag or promesaou trompluz, e teuim a-benn d'hen lakaad da renoñs d'an heritaj, dirag testou.

**Anton**

Posubl a-walh, avad !... Koulskoude, hervez va zantimant, e ve c'hoaz gwelloc'h gounid Jerman, rag ar marmouz-se a hellfe beza kalz noazuz deom, dre m'z eo bet re frank or genou dirazañ, hag her gouzoud a rez, hennez a vo braz e halloud dirag ar barner.

**Olier**

Petra da ober, neuze ?

**Anton**

Me a ve aviz e prometfem dezañ eun dra bennag gouest da ober plijadur d'e galon !

**Olier**

Ha me ivez ! Double barrikenn, n'eus ket a riskl evid prometi eur yalhad arhant : goude-ze ni daillo dezañ.

**Anton**

Dao dezi neuze !...Mond a ran d'her gervel ; mez da hortoz, kemer da vouchouer ha gra an neuz da zeha beb an amzer da zaelou. Goude-ze me en em gargo euz ar rest... Prest out ?

**Olier**

Ya ; pa gari e halvi Jerman.

## Seizved Diviz

**Anton**

Jermen... Jermenig, e peleh emañ 'ta ?

**Jermen**

Amañ emañ, o skuba ar porz-kloz.

**Anton**

Ne dalv ket ar boan en em skuiza evel ma rez ; deus emañ da varvaillad ganeom-ni eur pennadig.

**Jermen**

*(o tond)*

Petra 'zo nevez ganeoh, Anton ?

**Anton**

Selaou mad ar pezh ez an da lavared dit, va mignon.

N'on ket souezet e ve teñval da benn en deiziou-mañ, ha beuzet da galon gand ar glahar ; rag ar mestr az-peus kollet n'en-devoa ket e bar war an douar, eur mestr dous, eur mestr êz da gared.

**Jermen**

Koulskoude n'eo ket an dra-ze a lavareh bremañ.

**Anton**

Na da ket da ober van, Jermenig... Gwir eo, va breur Olier en-deus lezet eun nebeud komzou balh da goueza euz e henou, mez hen iskuzi a rankom ; ken glaharet 'oa bet o kleved 'oa maro Tonton Biel, m'en-deus ranket beuzi e hlahar en eur eva eur hart hini melen..

**Olier**

*(goude seha e zaoulagad)*

Setu petra eo kaoud eur galon re dener.

**Jermen**

*(en e bart e-unan)*

Ken braz komidian an eil hag egile.

**Anton**

Hen tui a hellan, Jermen, da vestr n'eo bet karet gand den ebed muioh eged gand Olier. Va dever eo hen disklêria uhel, rag, e kenkas ma teufe unan bennag da houlen da aviz, e ouezfes da vihanna petra da respont.

**Jermen**

Piou a zoñj deoh, a deuio da houlen va aviz war gement-se ?

**Anton**

An aotrou Valentin, sur a-walh, rag an oll varnerien a zo mad da guriuzad an dud. Lavar dezañ ar wirionez, hep kaoud aon e ven jalouz ouz va breur... Goude toud, paet e vezi : Olier

a vo joa gantañ rei dezañ, ouspenn poltred Tonton Biel, eun dra bennag all evid gelloud terhel soñj euz da vestr, euz e voutou pe eur jiletenn.

**Olier**

O breur ! ne gavan ket e ve a-walh kement-se : me a bromet rei rei dezañ eul lois aour, evid prena eur wiskamant a-zoare.

**Anton**

Gweled a rez, Jerman ? Hennez, a zo kalon toud, ha rei a rafe kement tra en-deus en aviz ober plijadur d'e nesa... (*Da Olier ; a vouez izel*). Ema dija gounezet ar marmouz.

**Jermen**

Petra 'livirit aze, a vouez izel ?

**Anton**

Edon o lavared d'am breur out bet atao eur servijer dispar dre al lealded az-peus diskouezet e servij da vestr.

**Jermen**

O ! kalz re a veuleudi evidon-me ! Deg gwech muioh eged na veritan... Gwelloh eo ganen distrei d'am labour.

**Anton**

Evel ma kavi an êsa, Jermanig ; ya, kerz da beurachui da labour, mez heb en em skuiza, ha n'ankounac'ha ket dreist-oll ar bromesa az-peus greet.

**Jermen**

*(diwar treujou an nor)*

Peseurt promesa ?

**Anton**

Her gouzoud mad a rez, Jermanig paour : ar bromesa da lavared ar wirionez dirag ar barner Valentin, e-giz ma 'm-eus diskouezet dit bremaig.

**Jermen**

Da genta, e houlennan amzer da ober va zoñj. (*Mond a ra kuit*).

**Anton**

Bez dizoursi, ni a vezo anaoudeg en da geñver.

**Olier**

Kenavo, Jermanig, kenavo, va mignon !

## Eizved diviz

*(Anton hag Olier en em laka da hoarzin... A ! A ! A !)*

**Anton**

Ahanta, breur, petra az-peus-te da lavared ? N'eo ket fonnuz ar bourenn emañ o paouez tenna ?

**Olier**

Eur pabor out ! evel ma n'eus ket kalz war an douar, ha mil boan em-boa o vired da ziroll pa edos oh ober da louarn gand Jermen.

**Anton**

Kredi a hellez n'eo ket euz ar re finna, hag abalamour da ze on deut a-benn d'her gounid buan a-walh.

**Olier**

Hag eur wech gounezet hennez, n'eus mui riskl ebed evidom, emichañs ?

**Anton**

Nann, riskl ebed... Kompren 'ta, a-benn daou zevez, setu-ni pinvidikaet gand liardou on Tonton Biel !

**Olier**

Ezomm ebed mui d'en em skuiza o labourad !

**Anton**

Bara gwiniz da zebri gand kig hag amann, n'eus forz pegement !

**Olier**

Ha gwin da eva diouz or sehed !

**Anton**

N'oa ket re abred e teuje on tro da veza savet e renk an aotrouien.

**Olier**

Ha da gleved an dud o lavared deom : Boñjour, aotrou Anton, boñjour, aotrou Olier, A ! A ! A !

**Anton**

Ken braz eo va levenez, ma n'ouzon ket petra 'vir ouzin da leusker eur bomm kañv, evid lavared kenavo d'or stad koz.

**Olier**

Double barrikenn, perag n'her grez 'ta ? Me da zikouro, ar gwella ma vo posubl din, petra bennag ma'z eo kraset va gouzoug...

**Manuel**

*(e-tal an nor)*

Eur gwennegig, mar plij, mar deo ho madelez.

**Anton**

Kleo piou 'zo aze adarre.

**Olier**

Laavret e ve ar memez bouroueller on-deus kaset dija ahaleze da foueta bro.

**Anton**

Kazi sur ; mond a ran da weled... (*D'ar paour*) : Petra 'glaskez amañ evid an eil gwech ?

**Manuel**

(*o tond war wel*)

Ne houlenan netra digand nikun ahanoh ho-taou.

**Olier**

Digand piou 'ta neuze ? Digand an ankou ?

**Manuel**

N'ema ket Biel Pendavad dre amañ ?

**Anton**

Biel Pendavad ?

**Olier**

On Tonton deom-ni ?

**Manuel**

Ya, ya, ho Tonton madelezuz !

**Anton**

Arsa ! Evid piou e fell dit or hemered ? Daoust ha n'on-deus-ni ket roet da entent dit eo sammet gand an ankou ?

**Olier**

Er vered du-ze her havi...

**Manuel**

Koulskoude n'eus ket c'hoaz deg munutenn abaoe ma 'm-eus her gwelet o treuzi e borz.

**Anton**

Ale, kerz ahaleze buan ; gwelloc'h eo dit eged chom da zirezoni deom evel ma rez.

**Olier**

Ha da ober deom koll on amzer !  
(*Biel en em ziskouez gand eul liñser wenn warnañ*).

**Manuel**

(*strafuillet*)

... O ! va Doue !...petra 'welan ?

## Naved diviz

**Anton**

Arsa ? achu az-peus gand da ardou fall ?

**Manuel**

*(o tiskouez)*

... Sellit... aze... a-dreñv ho kein.

**Anton hag Olier**

*a zistro da zelled*

... Piou an tonner !!

**Anton**

Eur farser bennag, sur a-walh, deuet amañ da glask or sponta.

**Olier**

En esper or pellaad marteze euz an ti-mañ, mez n'eo ket en em gavet eno c'hoaz.

**Anton**

C'hoant am-befe da baria eo Julian, hennez : o ! ya ! heb douetañs ebed... Julian ! Julian !

**Julian**

*(o tereded)*

Setu-me amañ, ha pa'z eo gwir am gwelit dirag ho taoulagad, ne hellan ket beza kuzet dindan al liñser-ze er memez amzer.

**Olier**

Jermen eo, moarvad, oh ober an neuz da veza brasoh eged ne deo e gwirionez... Diskouez da fas 'ta, marmouz.

**Jermen**

*(o tereded)*

Senti a ran, hag eur blijadur eo evidon diskouez amañ va fas evid rei deoh da gompren n'oh ket c'hoaz divinerien a-walh...

**Anton**

Mantruz eo ne vem ket gouest da zivinoud piou 'zo aze.

**Moris**

*(o tereded)*

Ar pezh 'zo sur, n'eo ket me eo, sakondienn.

**Valentin**

*(o tond raktal war e lerh)*

Na me kennebeud, nonde vingt-deux.

**Olier**

Mad, n'eus forz piou eo, eur spontaill distrantell n'eo ken ! A-veh ma ve mad da sponta brini !

**Julian**

Gweled a ran ho-peus mall, c'hwi ho-taou, da houzoud piou eo an den a zo aze dirazoh...  
Mond a ran d'hen dizelei.

... Digorit mad ho taoulagad... (*Hen dizelei a ra*).

**Anton**

Siwaz ! On Tonton Biel eo !

**Olier**

'Vid doare ne oa ket maro !



## Degved diviz

**Biel**

Nann, n'eo ket maro, a-drugarez Doue, ha chom a ra libr da ober ar pezh a garo euz e dammig peadra.

**Anton**

Iskuzit ahano, Tonton Biel.

**Olier**

Ni ho karo a-greiz kalon.

**Biel**

A-walh, mar plij, euz an ardou-ze, on bet test anezo abaoe ma'z oh en em gavet em zi... Lakit raktal an tokou a welan war ho penn er memez leh ma peus o havet... (*senti a reont*). Nizien divergont ma'z oh !! Nizien digalon ! na hedit mui kaoud netra euz an ti-mañ ! Julian hepken a zo din da veza va heritour : ne gav ket deoh, va mignoned ?

**An Oll**

(*nemed Anton hag Olier*)

Eo ! Eo !

**Biel**

(*en eur gregi e dorn Julian*)

Julian, dirag an oll destou a zo amañ, e tisklêrian a vouez uhel ne roin va leve da zen all ebed nemed dit ha d'am fillor Bielig.

**Julian**

Ho trugarekaad a ran, va Zonton, euz ho madelez em heñver, mez brasoh levenez a zo em halon, ma karfeh merka din peseurt lodenn da rei d'ho Jeremnig, a zo bet ken soursiuz en ho servij.

**Biel**

Da anaoud a ran bremañ, va niz, ha n'on ket nehet evid gouzoud e ouezi atao ranna gand Jerman kerkoulz ha gand kement paour a deuio e-tal da zor.

**Moris**

Kaozeal mad a rez, Biel, hag eur blijadur eo da gleved, kakebie !

**Biel**

Gwell a ze, Moris. (*Da Anton ha da Olier*). Deoh-c'hwi, n'am-eus eur ger hepken da lavared : distroit d'ar gêr, ha dalhit soñj n'eo ket deread kared eun Tonton nemed abalamour d'e liardou.

(*Anton hag Olier a ya kuit*)

**Valentin**

Nonde vingt-deux, lavar eta eo eun dra vezuz ! ha salo e teufe ar gentel-se da zioriba<sup>6</sup> en or bro an heritourien divergont ha digalon.

---

<sup>6</sup> zioriba : (diêz da lenn er skrid orin) : ?



